




KENVREURIEZ AR BREZONEG

(35,36,37,38,39-)

KAIEROU KENVREUZIEZ AR BREZONEG.

Taolenn an niverenn 38

1°) Kontant om bet, Aotrou Person....

2°) PEDOM EVID AN ANAON (Kendalh)

a) Lennadennoù tennet euz an Testamant Koz P.1 da 7

b) Lennadennoù tennet euz an Testamant nevez. p. 7 da 20

c) Diskanoù ha salmoù. p. 21 da 28

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreuziez ar Brezoneg" (koum. 20 lur)
her goulenn digand an:

Aotr. Job SETTE, Skol An Aod, 29249-GUISSENYÛ

CCP 1738-66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1°) "Levr-Overenn"

gand eur golo lër drevezet: 50 lur
gand eur golo plastik: 36 lur
gand eur golo paper kalet: 32 lur
+ mizou kas.

2°) "Komz Doue en overenn"

Levr T

30 lur

3°) "Komz Doue en overenn"

Levr A, B, C.

pebhini 20 lur

4°) Ar briedelez

8 lur

5°) AN Nouenn

8 lur

6°) Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. Livre d'accompagnement
(5ème édition) : 35 lur.

7°) Kroaziou Keltieg

(Bleun Brug)

: 3 lur

Troidigezioù aotreet da arnod
evid an eskobti a-berz an Ao. F. BARBU
Eskop Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 21 a viz du 1975

Visant FAVE, eskob-skoazeller.

KONTANT OM BET, AOTROU PERSON.....

Aotrou Person,

Da genta, bennoz Doue deoh ! Beb sul, d'an overennou e vez kanet kantikou e brezoneg, lod anezo a anavazen abaoe va bugaleaj hag eun drugar eo klevet penaos e tassion hag e tregern an iliz ganto " ken na gouez ar brenn euz r... ar zent", respet deoh, Aotrou Person.

Ar hantikou nevez e brezoneg, ho-peus desket deom, n'int ket fall kennebeud ha gwelloc'h-gwella e teuont ganeom.

Med, betek-henn, ne veze gêr brezoneg ebed ganeoh en iliz...Da houel an oll-zent diweza koulskoude, warlerh ho prezegenn e galleg, ho-peus distaget eun nebeud komzou e brezoneg hag e lavare an dud:

"Mad! brao e teu gantan ar brezoneg, koulz pe dost ha gand an Aotrou Person koz, Doue e bardono ! hag a brezege d'ahmad e brezoneg."

Kredit ahanon, Aotrou Person, an oll a zo bet kontant. Ha penaos ne vefent ket, gwir eo. Ar re n'ouzont nemed galleg-n'int ket stank en iliz!-o doa bet o lod e galleg. hag eul lodenn vras ! n'o-doa abeg ebed da glemm, nemed tud striz-spere det e vefent bet. Me gav din e lavarer "étroitesse d'esprit" e galleg.

Eur mab am-eus e Paris hag a skriv din eo stank an ilizou e-leh ma vez lennet diouwech an Aviel, e unan pe unan euz an overennou, eur wech e galleg hag eur wech e portugaleg, pa ouez ar veleien ez eus Portugalec en iliz. Eur portugalec eo a zeu da lenn. E iliz-Veur Sant Denez zoken, e vez beb sul eun overenn e portugaleg penn-da-benn lavaret gand eur beleg portugalec.

"E lod da beb-hini,

'vo kuit da zen kaoud jalouzi."

Kalz tud er barrez a zo a-du gand ar pezh a skrivan deoh, med ne gredont ket mond d'ho kavoud, da lavared o zôj. Aon da ober poan deoh hag aon da veza kemeret evid tud diwarlerh. Ne blij da zen beza lakeet e renk an dud " arriérés". Galleg a ouzont mar kirit, med eur galleg disterig awalh, mad da zisplega ar pezh a dremen en o buez pemdeziek. N'o devez ket tro da gomz e galleg diwar-benn menozioù uhel, nebeud a dro da skriva siwaz! nebeud a dro da lenn nemed ar hazetennou ha c'hoaz gand ar re-mañ ne vez nemed gerioù pobleg, êz da gompren. Ar skrivagnerien o devez urz da jom tost d'o lennerien.

C'hwi, Aotrou Person, a rank displega en ho prezegennou menozioù uhelloc'h hag awechou ober implij euz gerioù kutuillet el levrioù desket hag a ya dreist or penn.

Ha neuze, Aotrou Person, souezuz eo: pa zeuit d'or gweled en on tiez pe en or parkeier, -ar pezh a ra plijadur eston deom-ne vez nemed brezoneg ganeoh, ha pa vezit en iliz, pe er gador-zarmon, netra nemed galleg !...Souezuz!...

Ni a garfe e vefe astennet eun nebeud, lod ar brezoneg en iliz, el lidérez, er prezegennou, lakom eur wech dre vare. Peogwir on-eus ar chañs da gaoud diou overenn beb sul eo êz re' muioh a blas d'ar brezoneg en unan anezo. Pebhini a hellfe neuze dibaba diou e c'hoant.

Moarvat, n'am-bo ket feuet ahanoh, Aotrou Person, gouzoud mad a rit pe peseurt doujañs am-eus evidoh.

A.... unan euz ho parrezioniz.

(embannet gand aotre an oberour.)

PEDOM EVID AN ANAON.

LENNADENNOU GAND AN OVERENNOU EVID AR RE VARO.

Ar roll lennadennou-mañ zo bet savet ha renket hervez al levr nevez-embannet (1974) "Lectionnaire pour la liturgie des défunts."

1- Makabeed II 12/43-46

Eun dra vad eo pedi evid ar re varo.

Pedi evid ar re a garom hag a zo eet d'ar bed all a zo diskouez on-eus feiz en adsao da veo hag on eus fiziañs d'o haoud endro beo e karantez an Aotrou Doue.

Lennadenn euz eil levr ar Vakabeed:

43. En amzer-se, Judaz, ar brezellour kaloneg, goude beza greet eur gest, a gasas daou vil pezh arhant da Jerusalem da veza kinniget e sakrifis evid ar pehed.
Just ha santel e oa e gredenn diwarbenn adsao ar re varo da veo.

44. Rag ma nefe ket bet a fiziañs a tlee ar re kouezet war an dachenn sevel endro da veo, e vefe bet didalvez ha diskiant pedi evid ar re varo.

45. Soñjal a ree ar gaer a zigoll o-doa da gaoud ar re a varv en doujañs a Zoue.

46. Eur menoz santel ha talvoudus e oa kement-se.
Setu perag e kinnigas ar zakrifis evid ar pehed, evid ma vefe ar re varo dilivret euz o fehejou.

2- Job 14 /1-3, 10-15.

Daoust ha fin a vo da beb tra gand ar maro ?

Dirag maro eun den karet e houlenner ouzor an-unan: petra zeuer da veza goude ar maro ? war eun dro e sav er galon anken ha fiziañs.
Selaouom an den santel Job; a beb seurt soñjou a zeu dezañ.

Lennadenn euz levr Job:

1. An den, ganut gand ar vaouez,
a zo berr e vuez, karget avad a drubuilhou.
2. Evel eur vleunenn e tigor hag a oueñv
tehed a ra evel eur skeud, heb arsao.
3. Warnañ eo e troit ho sellou
hag eñ eo e halvit dirazoh d'e varn.
10. Dinerz e chom an den a varv,
ha pa vez maro, petra deu da veza ?
11. An doureier er mor a hell steuzia
hag ar stêriou mond d'an hesk ha dizeha:
12. Evel-se an den, eet en e gousk, mui ne zavo,
tremen a ray an neñvou araog ma tihuno.
ha ma savo euz e gousk.
13. Ma teufeh c'hoaz d'am huzed e bro ar re varo
ha d'am diarbenn da hortoz ma ve torret ho kounnar
a hellfed divizoud ar mare ma teufeh da gaoud soñj ahanon.
14. An den, eur wech maro, ma hellfe adsevel da veo,
e-keid ha ma vefen o hedol, e talfer fiziañs
beteg ma teufe evidon ar mare.
15. Va gelver a refeh ha me a respontje deoh,
c'hoant ho-pefe da gavoud endro labour ho faouarn.

3-Job 19/ 1, 23-27Bezom fiziañs e-kreiz an trubuilhou:

Ar Skritur Zakr a gont deom buez an den santel Job.
E lod eo bet dienez, kleñved, poaniou a bep seurt, med stard eo e feiz,
Selaouom e gomzou.

Lennadenn euz levr Job:

1. Evelhen e respontas Job:

23. Me a garfe e vefe skrivet va homzou,
karoud a rafen e vefent garanet en arem
24. gand ar gizell houarn hag ar minaoed
hag e vefent kizellet er mên evid atao.
25. Rag me oar, me, eo beo va divennour
hag e savo, d'ar fin, war bouldrenn ar re varo.
26. Va horv ganin e chomin em zav
hagand va daoulagad e welin Doue.

27. Ya, me a welo anezañ, me va-unan,
 ha pa baro va daoulagad warnañ
 ne droio ket diouzin.
 Leski a ra va halon em hreiz.

4-AR FURNEZ 2/1-4a ; 22-23; 3/1-19 (krennet: 2/1-4a; 3/9)

Petra da zoñjal euz ar vuez hag euz ar maro ?
 Ne jom dén dizeblant dirag ar maro.
 Petra da zoñjal euz ar vuez ? hag euz ar maro ?
 Disheñvel eo ar respont roet gand an dud a feiz ha gand an dud difeiz.

Lennadenn euz Levr ar Furnez:

- 2/1 An dud digredenn n'ema ket ar wirionez ganto
 pa gomzont enno o-unan evelhen:
 -"Berr ha trist eo or buez,
 pareañs ebed ne'z eus d'an den e fin e vuez,
 n'eus bet gwelet den morse o tond endro euz bro ar re vero.
 2 Dre zigouez ez om deuet war an douar,
 ha goude, e vezim evel ma ne vefe ket bet ahanom;
 ar huezadenn euz or fronellou
 a ya da netra evel ar moged,
 hag ar zoñj a zo eun elvenn-dan.
 hag a darz diwar or halon o lammed.
 3 Ma teu dezañ mervel, da ludu ez ay ar horv
 hag ar spered a deuzo evel eun aezenn skañv.
 4 Gand an amzer, e vo ankounac'heet on ano;
 ha m'e-no den soñj euz ar pezh on-dezo greet."

22. Ar re a gomz evelse ne anavezont ket sekrejou Doue
 Ne gred ket dezo e hellfe ar zantelezh beza digollet
 ne gred ket dezo e hellfe eun ene direbech mond d'ar hloar.
 23. Doue e-neus krouet an den evid beva da viken
 greet e-neus anezañ eur skeudenn
 euz ar pezh m'eo e-unan.

- 3/1. Etre daouarn Doue ema buez an dud just
 gwaskêrêz ebed n'he-deus krog warno.
 2. Evid an den diboell e seblantont beza marvet,
 o maro, d'e zoñj, a zo bet eur gwaleur.
 3. P'o-deus kuiteet ahanom e kreded e oant eet da netra
 ha padal emaint e peoh.
 4. Hervez kredenn an dud e oant bet kastizet;
 med dre o esperañs e oant dija divarvel.
 5. Dister a dra eo ar pezh o-deus bet da houzañv
 e-skoaz an eürusted heb par a vo o lod.
 Rag Doue e-neus o amprouet hag o havet din anezañ.
 6. Evel an aour paseet dre an tan
 e-neus o amprouet
 evel eur zakrifis parfed
 e-neus o digemeret.
 7. D'an deiz ma teuo da dremen, e skedint,
 evel elvennou-tan o redeg a dreuz ar zoul.
 8. Bez'e vezint barnerien war ar broadou
 ha mestri war ar poblou
 hag an Aotrou a reno warno da viken.

9. Ar re a laka o fiziañs en Aotrou
a intento ar wirionez
ar re a zo fidel a jomo gantañ en e garantez
rag d'ar re zibabet gantañ
e ro gras ha trugarez.

5-AR FURNEZ 2/23 ; 3 / 1-6 ; 9

ETRE DAOUARN DOUE EMA BUEZ PEB DEN.

Eun dra garo eo gweled ar maro o skel unan pe unan euz on tud, peadra d'ober deom koll ar feiz. Red eo deom kredi koulskoude n'eo ar maro nemed eun tremen evid kaoud perz e buez Doue.

LENNADENNOU EUZ LEVR AR FURNEZ:

2/23. Doue e-neus krouet an den evid beva da viken,
greet e-neus anezañ eur skeudenn euz ar pezh m'eo e-unan.

3/1. Etre daouarn Doue ema buez an dud just,
gwaskerez ebéd n'he-deus krog warno.

2. Evid an den diboele seblantont beza marvet,
o maro, d'e zôñj, a zo bet eur gwaleur.

3. P'o-deus kuiteet ahanom e kreded e oant eet da netra,
ha padal emaint e peoh.

4. Hervez kredenn an dud e oant bet kastizet
med dre o esperañs e oant dija divarvel.

5. Dister a dra eo ar pezh o-deus bet da houzañv
e-skoaz an eürusted heb par a vo o lod;
rag Doue e-neus o amprouet.
hag o havet din anezañ.

6. Evel an abur paseet dre an tan,
e-neus o amprouet;
evel eur sakrifikis parfed
e-neus o digemeret.

7. Ar re a laka o fiziañs en Aotrou
a intento ar wirionez;
ar re a zo fidel
a jomo gantañ en e garantez
rag d'ar re zibabet gantañ
e ro gras ha trugarez.

6- AR FURNEZ 4/ 7-15

(EVID EUN DEN MARO yaouank ha bet santel e vuez)

E BERR AMZER EO BET HIR AN HENT E-NEUS GREET:

Ar pezh a ra talvoudegez eur vuez n'eo ket ma vefe bet hir, med ma vefe bet santel. Doue a lenn e goueled ar halonou.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ.

7. An den just ha goude ma teufe dezañ mervel araog e oad a gavo an diskuiz.
8. N'eo ket diouz an hir amzer e-neus bevet eo barn enor ar hiziad;
n'eo ket diouz an niver a vloaveziou eo e boueza.
9. Evid an den, gwell eo furnez eged bleo gwenn;
buez dibeh a dalv kozni hir.
10. Gouezet e-neus plijoud da Zoue,
ha Doue e-neus e garet.
O veza m'edo o veva e-touez ar beherien
eo bet sammiet euz ar bed.
11. Sammet eo bet
gand aon a zeufe an droug da gaillara e goustiañs
hag ar gaou da douella e ene.
12. Rag touellerez an droug a deñvalla ar mad
ha froud an techou a ra gaou
ouz eur spered divlamm.
13. Tizet gantañ ar pal e berr amzer
e-neus dibunet eun hent hir.
14. O veza ma plij da Zoue
Doue, heb gortoz muioh
e-neus e zilamet euz ar bed fallagr.
15. An dud a wel kement-se heb intent muioh
ha ne zeu ket en o spered
e ro Doue d'ar re zibabet gras ha frugarez
hag e veill war e vignoned.

7-IZAIAZ 25/ 6a, 7-9 :

Doue a zo treh d'ar maro.

Kañv ha daelou a gav an den war an douar...

Mad eo deom kleved ar profed o t'skleria eo treh Doue d'ar maro.

hag e vo eur bed nevez el leh ma tastumo Doue e bobl e-kreiz al levenez.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAZ:

6. En deiz-se, an Aotrou, mestr ar bed
a bourchaso war ar menez-mañ
eul tein vraz evid an oll boblou.
7. War ar menez-mañ e rogo ar ouel a hronne an oll boblou
hag ar pallenn o goloe.
8. Distruj a ray ar maro evid atao;
hag an Aotrou a zeho an daelou war an oll dremmou,
hag e tilamo kuit diwar e bobl,
an dismegañs taolet warnañ dre ar bed a-bez,
rag Doue eo e-neus hen lavaret.
9. Hag e vo lavaret en deiz-se:

"Setu on Doue; ennañ edo or fiziañs, or saveteet e-neus
Doue, edo on esperañs ennañ.
Bezom el levenez, bezom l'ouen,
rag dorn Doue a ziskuizo war ar menez-mañ.

8- KLEMMGANOU 3/ 17-26 :

Daoust da beb tra, ne gollan ket fiziañs.

Fall ez a ar stal; da gredi eo ez eo kollet peb tra....
An den e-neus feiz ne zeu ket da fallgalloni; eun elvenn a esperañs
a jom gantañ; Doue a gar ahanom evel m'emaom, n'am dilezo ket.

LENNADENN EUZ LEVR AR HLEMMGANOU:

17 Soñj ebed ken na jom ganin euz an eürusted,
ha kuit diouzin eo eet ar peoh!

18 Hag em-eus lavaret; va fiziañs a zo eet da netra;
hag ivez an esperañs a zeue din a-berz an Aotrou.

19 Soñjal ha soñjal en dienez m'on kouezet
n'eo evidon nemed e'hwervoni hag empoezon.

20 Heb ehan e sav ar zoñj-se em ene
hag e welan; va ene o tinerza.

21 Med setu e tigas an din da soñj
er pez a ra va esperañs.

22 Madeleziou Doue; chom a ra c'hoaz anezo,
hag e drugareziou na ehanont ket.

23 Beb min-tin e teuont da renevezi,
rag fidel eo an Aotrou heb morse skuiza.

24 Ennon va-unan e lavaran: va lod eo an Aotrou,
setu perag em-eus fiziañs ennañ.

25 Mad eo an Aotrou evid neb a dro warzu ennañ,
evid an neb a zo war glask anezañ.

26 Eun dra vad eo gortoz e peoh
sikour a-berz an Aotrou.

9-DANIEL 12/ 1b -3:

Ar re varo a zihuno eun deiz er sklerijenn....

E-kreiz an dienez hag en anken, komzou ar profed Daniel
a zigor or halon d'an esperañs.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED DANIEL:

ME, Daniel, a oa e kañv hag e klevi
ar homzou-mañ a-berz an Aotrou:

1. En amzer-se e savo Mikâl, an hini 'zo e penn an Elez,
dihmad o veilla war bugale da bobl;
hag e teuo eur mare leun a anken, evel ma n'eus bet biskoaz
abaoe ma'z eus poblou war an douar.
En amzer-se, e vo saveteet da bobl,
kement hini a vo kavet e ano skrivet war al levr a vuez.
2. A vagadou e tihuno ar re 'zo kousket e poul-trenn an douar,
darn evid ar vuez peurbaduz,
darn all evid ar vêz hag an dismegañs da viken.
3. Ar re o do bet furnez a lugerno evel splanndêr an oabl,
hag ar re o do desket hent ar mad d'an dud all
a skedo evel ar stered da virviken.

10-OBEROU AN EBESTEL

10/ 34-43

(Krennet 10/ 34-36; 39-43)

Doue a zo deuet da zavetei an oll dud.

Garanet don e oa ar gredenn-se e kalon ar gristenien,
diazezet war desteni an Ebestel o-deus gwelet Jezuz Krist
dazorhet ha beo. An oll dud, hirio c'hoaz, a hell maga an heveleb espe-
rañs.

LENNADENN EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL.

(10.34-38)

34. E ti an ofiser Korneli, Per a zo kroget da gomz:
"E gwirionez, emezañ, kompren a ran
ne ra ket Doue gwelloc'h stad euz tud 'zo;
35. er hontrol, e kement gouenn pe bobl a zo,
an dud a zouj anezañ hag a zo reiz o buez a blij
dezañ.
36. Digaset e-neus e gomz da vugale Israel, gand kelou mad ar peoh
dre Jezuz Krist: hemañ 'zo Aotrou war an oll dud.
37. Gouzoud a rit, c'hwi, ar pezh 'zo bet c'hoarvezet e Bro-Judea a-bez;
boulhet eo bet an traou e Bro-Hallilea.
38. Jezuz a Nazared e-neus Doue sakret anezañ,
o rei dezañ ar Spered Santel hag e halloud.
Tremenet eo e peb leh en eur ober vad
Hag en eur barea kement hini a oa gwasket gand an
Rag Doue a oa gantañ. diaoul.
39. Ha ni, an Ebestel, a zo testou war an oll draou e-neus greet
e bro ar Yuzevien hag e kêr Jerusalem,
eñ an hini o-deus laketa d'ar maro, o staga anezañ ouz koad eur groaz;
40. eñ ivez an hini e-neus Doue dazorhet (pe: savet da veo) d'an dreda deiz,
ha greet dezañ en em ziskouez.
41. n'eo ket d'ar bobl a-bêz, med d'an testou dibabet a-viskoaz gand Doue,
deom-ni, hag a zo bet o tebri hag oh eva gantañ
goude m'eo bet savet a-douez ar re varo.

42. Ha deom e-neus roet an garg da embann ar helou d'ar bobl
ha da rei testeni ez eo en an hini e-neus Doue laketa
da varner ar re veo hag ar re varo.

43. Dezañ eo e ro an oll Brofeted an testeni-mañ:
ar pardon euz e behejou a resev drezañ
kement hini a lak e feiz ennañ."

11-ROMANED 5/ 6b-11

Doue e-neus karantez evidom; ar merk euz ar garantez-se:
An Aotrou Krist a zo marvet evidom.

Jezuz Krist e-neus bevet er stad a zen m'eo on hini;
marvet eo ha goude-se dazorhet.
Trehet eo bet gantañ ar maro. Beo eo hirio
ha gantañ ni a vev. Setu on esperañs.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED:

6. Breudeur, d'ar mare ma'z oam c'hoaz dinerz,
neuze, d'an eur merket gand Doue, e varvas ar Hrist evidom, peherien.
7. Asanti mervel evid eun den just a zo diêz,
med marteze, evid eun den a galon, ez afed beteg rei ar vuez.
8. Amañ, eo e tiskouez Doue e garantez evidom:
maro eo ar hrist evidom, d'ar mare ma'z oam c'hoaz peherien.
9. Kent-a-ze eta, bremañ, pa'z om deuet da veza just dre wad ar Hrist,
e vezim diwallet gantañ a-eneb kounnar Doue.
10. Peogwir, pa'z oam enebourien dezañ,
ez om bet lakeet e peoh gand Doue, dre varo e Vab,
kent-a-ze ivez, bremañ, p'emaom e peoh gantañ,
e vezim savetæet dre vuez ar Hrist.
11. Gwelloh c'hoaz, or gloar a lakeom e Doue, dre Or Zalver Jezuz Krist
e-neus on lakeet bremañ dija e peoh gand Doue.

12-ROMANED 5/17-21:

Karantez Doue azeu d'or zavetei dre an Aotrou Krist.

Kred om an eil evid egile, koulz en droug evel er mad;
kred er pehed med ivez kred en treh deuet gand ar Hrist,
deom da gaoud perz en e adsao da veo.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED:

17. Va breudeur, evel m'eo deuet dre unan hebken, dre faot unan hebken,
ar maro da ren,
e feuo, muioh c'hoaz, ar re a reseo puill donezon gras Doue,
da ren dre unan hebken, dre Jezuz Kr'ist.
18. Setu eta, evel m'eo bet kondaonet an oll dre faot unan hebken,
evelse ivez ar justiz gounezet gand unan hebken,
a zigas d'an oll eur justiz a ro buez.

19. Evel m'eo deuet an oll da veza peherien dre zizentidigez unan hebken,
evelse ivez e vo santelleet an oll dre zentidigez unan hebken.
20. Evid lezenn Voizez,
deuet eo evid ma'z afe ar pehejou war stankaad;
med, el leh m'eo eet ar pehejou war stankaad,
eo eet ar hras muioh c'hoaz war buillaad.
21. Evel m'e-neus ar pehed renet o rei ar maro,
evel-se ar hras, mammenn a justiz
a die ren ivez evid rei ar vuez peurbadel,
dre Jezuz Krist, on Aotrou.

13-ROMANED 6/ 3-9 (krennet 6/3-4; 8-9)

Tremen dre ar maro gand an Aotrou Krist evid beva gantañ.

Dre ar vadiziant e teu or buez da veza unanet stard gand buez an
Aotrou Krist. Ma'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist, e kredom
e vevim ivez gantañ.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED:

3. Va breudeur, her gouzoud a rit, ni oll hag a zo bet badezet,
er Hrist ez om bet badezet.
4. Sebeliet om bet a-unan gantañ, dre ar Vadiziant en e varo,
evid ma teufem da ren ni ivez eur vuez nevez,
evel ma'z eo adsavet da veo an Aotrou Krist, dre halloud skeduz an Tad.
5. Rag, mar dom deuet da veza unan gantañ dre eur maro heñvel ouz e hini,
e vezim ivez unan gantañ dre eun adsao da veo heñvel ouz e hini,
6. Her gouzoud mad a reom: ar sklavour d'ar pehed ma'z om, a zo bet staget
war groaz, war eun dro gantañ, evid ma vefe distrujet an natur-se
a behed ha na vefem mui dindan sklavaj ar pehed.
7. Rag an neb a zo maro a zo dilivret diouz ar pehed.
8. Med, ma'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist,
e kredom e vevim ivez gantañ
9. Rag, her gouzoud a reom: ar Hrist savet a varo da veo ne varv mui;

14-ROMANED 8/14-17

E-kreiz on trubuilhou, e chom Doue on Tad.

Klask a ra Sant Paol ober deom kaoud perz en e fiziañs;
Daoust da beb tra, arabad eo deom kaoud aon. Troom war-zu Doue
Eñ hag e-neus greet ahanom e vugale.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED.

14. Va breudeur, an oll dud a vez renet o buez gand Spered Doue,
ar re-ze a zo bugale da Zoue.
15. M'ho peus resevet ar Spered, n'eo ket evid ober ahanoh c'hoaz,
e-keñver Doue, servicherien o krena gand aon;
med resevet ho peus eur Spered hag a ra ahanoh
bugale digemeret e famil Doue,
ar Spered a lak ahanom da grial dezañ: "Abba! Tad!"
16. Ar Spered Santel e-unan a ro testi d'or spered-ni
ez om bugale da Zoue.
17. Neuze'ta, ma'z om e vugale, ez om ivez heritourien d'le vadou,
heritourien da Zoue, hogen ken-heritourien a-unan gand an Aotrou Krist,
peogwir a-unan gantañ on eus da houzañv or poaniou
evid mond ivez a-unan gantañ e gloar Doue.

15-ROMANED 8/18-23

Kaoud fiziñs en eur bed nevez.

War-zu peleh ez eom a-dreuz ar poaniou hag ar maro or gwask ?
Warzu eur bed nevez o tarza e-kreiz ar boan. "Gwilioud ebed heb poan,
poan ebed heb gwilioud."

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED:

- Va breudeur,
18. D'am soñj, n'eo netra ar poaniou a houzañvom bremañ,
e-skoaz ar hloar a dle beza roet da anaoud ennom.
19. Rag ar bed krouet a zo o hortoz gand mall e ve roet da anaoud gloar Doue.
20. Rag, mar deo bet lakeet dindan galloud an dizurz
-ha n'eo ket a-benn-e-greizson,
med ablamour d'an hini, e-neus greet dezañ plega d'an dizurz-
21. eo an esper da veza eñ ivez dilivret euz sklaverez an droug
ha kaoud perz e frankiz a zo e gloar bugale Doue.
22. Hen gouzoud mad a reom: an oll draou krouet a zo o hirvoudi,
hag o houzañv poaniou eur gwilioudi, a bad c'hoaz bremañ.
23. Med o hortoz emañ beza kemeret evel bugale da Zoue
ha gwelet or horv dasprenet.

16-ROMANED 8/31 b-35 ;37-39:Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist?

An Aotrou Krist e-neus or haret beteg mervel, med e garantez a zo bet
treh d'ar maro, peogwir eo dazorhet hag ez eo beo. N'hell netra on dis
taga diouz karantez Doue; aze emañ on espereñs.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED.

31b. Va breudeur kër, m'ema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom ?

32. N'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan,
roët e-neus anezañ evidom oll:
penaoz, gand e Vab, ne rofe ket deom peb tra ?

33. Piou a zavo a-eneb an dud dibabet gand Doue,
paz eo Doue an Hini a laka dibeh ?

34. Piou a gondaono, pa'z eo Jezuz Krist an hini 'zo marvet
gwelloc'h c'hoaz, a zo savet da veo, a zo en tu deou da Zoue
hag a bed anezañ evidom ?

35. Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist !
ar waskerezh, an anken, an heskinerezh, an naon,
an dienez, ar riskl, ar hleze ?

37. Nann ! e kement-se ema an treh ganeom,
dre zikour an hini e-neus or haret.

38. Ya, sur on a gement-se;
nag ar maro, nag ar vuez,
nag an êlez nag an oll gallouduziou kuzet,
nag an amzer vremañ nag an amzer da zond
nag ar stered, nag an neñvou, nag an donderiou,
na netra krouet all ebed
netra n'hello on distaga diouz karantez an Aotrou Doue
a zo e Jezuz Krist, on Aotrou.

17-ROMANED 14/7-9, 10b-17 (krennet 14/7-9)

BEVA HA MERVEL EVID AN AOTROU:

Petra eo ar vuez ? Petra eo ar maro ? Goulennoù hag a reom ouzom on-
un an.

Setu amañ a r respont a ro Sant Paol.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED:

7. Va breudeur, ne vev, nikun ahanom, evitañ e-unan,
ha nikun ne varv evitañ e-unan.

8. Rag ma vevom, e vevom evid an Aotrou,
ma varvom, e varvom evid an Aotrou.
En or buez hag en or maro, ez om d'an Aotrou.

9. Rag, ar Hrist a zo marvet ha savet da veo,
evid dond da veza mestr ar re varo hag ar re veo.

10. Oll e rankim mond dirag lezvarn Doue.

11. Rag skrivet eo:
Ken gwir ha ma'z on beo, eme an Aotrou,
dirazon e plego peb glin
ha peb teod a rento gloar da Zoue.

12. Evelse peb-hini ahanom
e-no da renta kont da Zoue evitañ e-unan.

18- DA GRISTENIEN KORINT

(I Kor. 15/ 1-5 ,11)

NI AGRED E JEZUZ KRIST,MAR VET HA DAZORHET.

Ar helou mad digaset deom gand Jezuz eo an Aviel.
 Gand ar rummadou tud o-deus bevet en on raog,
 e kredom eo beo ar Hrist.
 E garantez a zo treh da bep tra, treh d'ar maro.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT:

- 1.Va breudeur, bremañ am-eus da zisplega deoh an Aviel
 am-eus prezeget deoh, ho-peus digemeret, hag a zálhit dezañ;
- 2.dre an Aviel-se e viot saveteet,
 gand ma virot anezañ evel m'am-eus e brezeget deoh;
 a-hend-all, eo en aner ho-pefe kredet.
- 3.Ar pez am-eus desket deoh araog peb tra, hag am-eus desket va-unan,
 eo kement-mañ: Ar Zalver a zo bet marvet evid p or pehejou,
 evel ma oa lavaret er Skrituriou;
- 4.Laket eo bet er bez, ha d'an trede deiz eo adsavet da veo,
 evel ma oa lavaret ivez er Skrituriou;
- 5.En em ziskouezet eo da Bèr, ha goude d'an Daouzeg.
- 11.Evelse 'ta, inti koulz ha me, setu ar pez a brezegom,
 ha setu ar pez ho-peus kredet.

19.DA GRISTENIEN KORINT

I Kor. 15/12, 16-20

Ar KRIST A ZO DAZORHET... NI IVEZ A ZAVO A VARO DA VEO.

Lavaret a vez:"An dud a gred o-deus chañs ,
 muñoh a nerz-kalon o-devez pa gouez warno poan hag enkreiz..."
 Med, petra eo ar gredenn-se a ro nerz-kalon ?
 Selaouom Sant Paol.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT.

12. Va breudeur, ma prezeger eo adsavet an Aotrou Krist a-douez ar re varo,
 penaoz e hell lod ahanoh lavared n'eus ket a adsao ar re varo ?
- 13.Ma ne zav ket ar re varo da veo,
 neuze an Aotrou Krist, kennebeud,n'eo ket savet da veo;
- 17.Ha ma n'eo ket savet an Aotrou Krist da veo,
 n'eo diazezet ho feiz war netra, hag emaoch c'hoaz en ho pehejou.
- 18.Neuze ivez, ar re a zo maro en Aotrou Krist a zo kollet evid mad.
- 19.Ha ni, ma'z eo er vuez-mañ nemedkén on eus esperañs en Aotrou Krist,
 ez eo or stad ar reuzeudika a hell beza.
- 20.Med bremañ, setu ar wirionez: an Aotrou Krist a zo savet a-douez ar re
 varo,
 ar henta euz an dud tremenet,
 evel an dornad greun kenta euz an eostad.

OLL E VEV.M ENDRO HAG E KAVIM EUR VUEZ NEVEZ EN AOTROU KRIST.

Tonket eo an oll d'ar maro... Setu planedenn mab-den; med n'eo ket echu toud.

Er penn diweza, ni a gred ema ar vuez: ar vuez gand Jezuz Krist, trehour da beb droug.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT:

19. Va breudeur, ma'z eo evid ar vuez-mañ nemedken on-eus esperañs en Aotrou Krist, ni a zo or stad ar reuzeudika a hell beza.

20. Med or Zalver a zo savet a-douez ar re varo, an hini kenta euz an dud eet e kousk ar maro.

21. Evelse, koulz ha ma oa deuet ar maro dre eun dén, dre eun dén ivez e teu an adsao da veo.

22. En Adam e varv an oll, en Aotrou Krist o-do an oll ar vuez en-dro,

23. Med peb-hini en e renk; an Aotrou Krist da genta penn. diwezatah ar re'zo d'an Aotrou Krist, da geñver e zistro.

24. Da houde, e vo echu peb tra, pa lako e rouantelez etre daouarn Doue, e Dad, goude beza diskaret peb nerz ha peb galloud a-eneb.

25. Rag eñ eo a dle kaoud ar garg a roue, ken na 'no laket an oll enebourien dindan e dreid.

26. Hag an diweza enebour da veza diskaret e vo ar maro.

28. Neuze, pa vo peb tra dindan e halloud, ar Mab e-unan en em lakay dindan galloud an Tad, e-no lakeet peb tra da zuja dezañ, hag evelse e vo Doue peb tra e kement tra'zo.

O maro, e peleh ema ganit da dreh ?

Aon a ra deom ar maro, o veza ma kred deom ema gantañ ar fin a bep tra. Jezuz eo ar henta e-neus tremenet euz ar maro d'ar vuez n'eus fin ebed dezi. Eveldañ, ni ivez a vo treh d'ar maro.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT

Va breudeur,

51. Eur mister ez an da lavared deoh: ne varvim ket oll med oll e vezim cheñchet.

52. En eun netraig, e amzer eur wilhadenn: ouz taol diweza an drompill; rag sini a ray an drompill, hag ar re varo a zavo da veo da veza divreinuz; ha ni, ni a vezo cheñchet.

53. Rag red eo e teufe da veza divreinuz
ar pezh a zo breinuz ennom,
ha divarvel ar pezh a zo marvel.

54. Pa vo ar horv-mañ, tonket dezañ mond da vreinañ,
gwisket gand ar vertuz e lako divreinuz,
pa vo ar horv-mañ, tonket dezañ marvel,
gwisket gand ar vertuz e lako divarvel,
neuze e teuo da wir ar homzou 'zo er Skritur Zakr.

57. Ra vo trugarekeet Doue,
eñ hag a ro deom an tresh dre Or Zalver Jezuz Krist.

22-DA GRISTENIEN KORINT

(II Kor. 4/13-5/1)

EN EM STAGA OUZ AR PEZH A BAD.

Traou a zo hag a dremen, traou a zo hag a bad...
Petra a gont evid Doue ? Kement a reom evid diskouez
on harantez, evid servicha ar re all, ar boan
a gemerom evid anaoud ha kared ar Hrist.
Setu ar pezh a ray ol levenez pa vezim dirag Doue.

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT:

13. Va breudeur, spered ar feiz on eus, hervez m'eo merket er Skritur:
"Kredet am eus, rag-se am eus komzet."
Ni ivez on eus ar feiz, rag-se e komzom.

14. Rag, her gouzoud a reom ervad,
an hini e-neus adsavet an Aotrou Jezuz da veo
on adsavo, ni ivez, a-unan gand Jezuz hag on lakaio ganeoh en e gichen.

15. Kement a reom a zo ablamour deoh,
evid ma teui grasou puill, da greski bepred, evid gloar Doue;
an anaoudegez vad e kalonou eun niver brasoh a dud.

16. Setu perag ne fallgalonom ket;
ha, daoust ma'z a da fall ennom an den diavêz,
e talh an den diabarz ahanom da nevesaad euz an eil deiz d'egile.

17. Ya, on trubuillou er bed-mañ, skañv da zougen ha tremenuz,
a bourchas evidom eun digoll peurbaduz a hloar dreist-muzul.

18. Setu perag n'eo ket war an traou a weler eo paret or zellou,
med war an traou na weler ket.
an re a weler n'int ket da badoud, med ar re na weler ket a zo peur-
baduz.

Her gouzoud a reom, ma teu on demeurañs war an douar da veza diskaret,

15-1. On eus en neñvoù eun ti savet gand Doue, ha n'eo ket diwar zorn an dén,
eun demeurañs peurbaduz

23-DA GRISTENIEN KORINT

(II Kor. 5/1, 6-10)

EUN HENT EMAOM WAR-ZU ON GWIR VRO.

Evid ar hristen, n'eo ket echu peb tra gand ar maro; n'eo ar maro
nemed eun tremen daved Doue.

"Baradoz dudiuz, bro ar Zent eo va bro."

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT:

1. Va breudeur, her gouzoud a reom,
ar horv, a zo anezañ on demeurañs war an douar, a die beza distrujet;
med, Doue a zav evidom en neñvou eun demeurañs peurbaduz
ha n'eo ket diwar dorn an den.
6. Dineh-kaer e chomom bepred (pe: stard or halon e chomom bepred),
ha pa ouzom penaoz, keid ha m'emaom o vev en or horv,
emaom en harlu, pell diouz ti an Aotrou Doue;
7. rag dre ar feiz e kerzom (warzu ennañ) n'eo ket dre ar gweled anezañ.
8. Ya sur, dineh-kaer ez om, ha kalz gwelloh e kavom
diloja euz ar horv-mañ ha mod da vev e ti Doue.
9. Or brasa preder eo plijoud dezañ, koulz er gêr pe pell diouz e gêr.
10. Rag oll e rankim en em ziskouez evel m'emaom,
evid beza barnet gand or Zalver,
ha reseo peb hini ar pezh e-no gounezet o vev en e gorv, mad pe 'fall.

24-DA GRISTENIEN KER FILIP 3/20-4/1EUN DEIZ DA ZOND E SAV'M A VARO DA VEO; AR ZONJ-SE A RO DEOM NERZ-KALON

En Aotrou Krist ema on'esperañs da zevel eun deiz a varo da veo.
Dineh om war ar poent-se;
gouzoud a reom e ra deom ar maro tremen daved Doue.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN FILIP:

20. Va breudeur, ni eo an neñvou on gwir vro.
21. Ahano eo e hortozom da zond,
evel Salver, Jezuz Krist, on Aotrou.
En a jeñcho doare d'or horvou dister
hag a lako par d'e gorv gloriuz,
dre ar galloud e-neus da veza mestr war an oll draou.
- 4/1 Evelse-eta, va breudeur kër, am-eus mall da waled en-dro,
va levezet ha va hurunenn,
dalhit stard en Aotrou Krist, ya ! va breudeur karet.

25-DA GRISTENIEN TESALONIK I Tes. 4: 13-18DOUE A GEMERO AHANOM GANTAN:

Petra eo ar maro ? Petra'zo goude ar maro ?
Ar gristenien genta a ree ivez ar goulennou-se outo o-unan.
Setu amañ ar respont a ra Sant Paol.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESALONIK:

13. Va breudeur, ne fell ket deom e chomfe heb gouzoud ar wirionez,
diwarbenn ar re varo.
Na vezit ket glaharet, evel ar re all,
ar re n'o-deus esperañs ebed.
14. Evid gwir, ma kredom eo maro Jezuz,
hag adsavet da veo,
kredom kenkoulz all
e lakay Doue da adveva gand e vab,
ar re a zo maro e karantez Jezuz.
15. Setu amañ petra a lavarom deoh hervez komzou Doue;
ni, ar re veo, ni, ar re a vo chomet
beteg distro an Aotrou, or Zalver,
ne vezim ket araog ar re varo.
16. Rag an Aotrou e-unan, pa vo skoet an taol,
gand mouez an arhêl ha trompill Doue;
a ziskenno euz an neñv,
hag ar re varo, hag a zo er Hrist, a adsavo da genta.
17. Da houde, ni ar re i'vo beo, chomet beteg neuze,
a vo douget a-unan ganto war arhoabr,
evid mond da ziambroug or Zalver en êr,
hag evelse e vezim da viken gand an Aotrou Doue.
18. En em frealzit eta, an eil egile dre ar homzou-se.

26-TIMOTE II 2/ 8-13NI A VEVO GAND AN AOTROU KRIST:

Sant Paol e-neus en em roet penn-da-benn e servij an Aotrou Krist.
Ar re e-devo stourmet ha gouzañvet evit Rouantelez Doue hag e
justis n'o-devo ket kollet o foan na labouret en aner.
Digoll kaer o-devo digand Doue.

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA DIMOTE:

8. Dalh soñj euz Jezuz Krist da savet da veo a douez ar re varo,
ganet diwar lignez David.
Kement se eo va Aviel din-me.
9. Evid an Aviel e houzañvan poan;
beteg beza chadennet evel eun torfedour;
med, komz Doue ne vez ket chadennet.
10. Setu perag e houzañvan peb tra
evid an dud dibabet gand Doue
evid m'o-defe, int-i ivez, da lod, ar zilvidigez,
ha da heul ar hloar peurbaduz.
11. Difazi eo ar gomz-se:
Ma'z om marvet gantañ, gantañ ivez ni a vevo.
12. Ma houzañvan poan, gantañ ni a reno;
ma nahom anezañ, eñ ivez on naho.
13. Ma ne jomom ket fidel,
eñ a jomo fidel,
rag n'hell ket trei kein dezañ e-unan.

27-PER I P 1/3-8

EVID EUN ESPERAÑS BIRVIDIG:

Evel ma lavar an abostol Sant Per, maro eun den n'eo ket eun dra trist m'e-neus bet hed-a-hed e vuez an esperañs da weled Doue. deom-ni da intent e gomzou.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PER:

3. Meuleudi da Zoue, Tad Or Zalver Jezuz Krist,
e-neus bet ar vadelez vraz da rei deom eur vuez nevez,
dre Jezuz Krist savet a varo da veo,
ha roet deom eun esperañs virvidig.
4. eun eritaj ha ne hell ket breina, na beza saotret na gwenvi,
eun eritaj miret evidoh en Neñvou,
5. C'hwi hag e-neus galloud Doue dalhet, dre ar feiz,
evid ar zilvidigez, eur zilvidigez a zo prest d'en em ziskouez,
pa vo fin d'an amzeriou.
6. Kement-se ho laka da dridal gand ar joa,
daoust ma'z eo red deoh c'hoaz,
epad eur pennad amzer, kaoud da houzañv e meur a zoare.
7. Evelse, talvoudegez ho feiz, priziush eged an aour,
eun dra dibabuzn, hag a vez amprouet dre an tan,
a vo kavet din a veuleudi, a hloar hag a enor,
pa zeuy ar mare da Jezuz Krist d'en em ziskouez.
8. Kared a rit anezañ hab beza e weled
heb e weled c'hoaz bremañ, e kredit ennañ,
leun a feiz e tridit gand eur joa dreist-lavar ha leun a hloar.

28-YANN I 3/ 1-2

PENAOZ EZ OM KARET GAND DOUE:

Pa vezer gwasket gand ar vuez eo diez kredi ez eur karet gand Doue. Yann, an abostol karet gand Jezuz a lavar deom digeri daoulagad or halon:
eun deiz a zeuio eh intentim gwelloc'h petra eo Doue evidom.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT YANN:

1. Bugale vian, gwelit 'ta pebez karantez e-neus bet an Tad evidom,
befeg ober ma vefem anvet bugale da Zoue,
ha bez'ez om e vugale e gwirionez.
An dra-mañ 'zo kaoz ma n'hell ket ar bed anaoud ahanom:
rag ma n'eo ket evid anaoud Doue.
2. Va re muia karet, bremañ dija om bugale da Zoue,
ha n'eo ket c'hoaz deuet er sklerijenn ar pez a vezim.
An dra-mañ 'ouzm; pa vo deuet e-kreiz ar sklerijenn,
ni vo heñvel outañ, o veza ma welim anezañ evel m'ema.

29-YANN I 3/14, 16-20

AR GARANTEZ A RA DEOM TREMEN EUZ AR MARO D'AR VUEZ:

Chom heb kared a zo mervel; kared a zo beva.
Deom-ni eta kared evel ar Hrist, heb-konta; neuze e vo ar gwir vuhez
on lod.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT YANN:

14. Va muia-karet, ni a oar ez om tremenet
euz ar maro d'ar vuez,
dre'n abeg ma karom or breudeur.
An hini ne gar ket a jom er maro.
16. An dra-mañ eo e-neus greet deom anaoud ar garantez:
o veza m'e-neus Henez (Jezuz) roet e vuez evidom.
Ni ivez a dlee rei or buhez evid or breudeur.
17. An hini e-neus madou euz ar bed-mañ
hag a wel e vreur en dienez heb dond war e sikour,
penaoz e hellfe karantez Doue chom ennañ ?
18. Va bugale vian, karantez a dileom kaoud,
n'eo ket dre gomz na diwar beg an teod,
med dre ober hag e gwirionez.
19. Setu amañ penaoz e vezim sur da veza euz tu ar wirionez
hag e lakim or houstiañs er peoh dirag Doue.
20. ma tigouez e rafe or houstiañs rebechou deom,
Doue a zo brasoh eged or houstiañs hag a anavez peb tra.

30-YANN I 4/7-10:

DOUE A ZO KARANTEZ:

Unan bennag, kar deom, a zomeet d'ar bed all hag e houlennom
ouzom on-unan: daoust hag e garet on-eus awañ ? Piau a hellfe res-
pont: Ya ?
E Jezuz-Kristeo e kavom ar garantez kaset betek ar pella.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT YANN:

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile
peogwir eo ar garantez euz a Zoue
ha kement-hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue
hag e-neus anaoudegez a Zoue.
8. An neb n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhenn eo deuet -karantez Doue da bara en on touez:
e Vab unganet e-neus Doue kaset er bed, deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo ema ar garantez: n'eo ket ni on eus karet Doue,
med heñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab
da veza roet e sakrifis evid pardon or pehejou.

31- DISKULIADUR 14/13:EURUS AR RE VARO A VARV EN AOTROU:

Evid eun den a feiz, na kaer eo ar homzou-se:

"mervel en Aotrou". Selaouom Sant Yann hag a zo bet test euz (dazorh) Jezuz -Krist dazorhet.

LENNADENN EUZ LEVR AN DISKULIADUR:

Me Yann,

13. a glevas eur vouez hag a zeue euz an neñv, hag a lavare: Skriv: Euruz, bremañ dija, ar re varo a varv en Aotrou, Ya, eme ar Spered, ra ziskuizint euz o foaniou; rag d'o heul ez a o oberou.

32-DISKULIADUR 20/11 -21/1PA VO DIGOR FRANK AL LEVR EUZ AR VUEZ:

Amañ, eur weledigez da ZAnt Yann: gweled a ra Doue o trehi war ar maro. G and Doue e vo treh ivez kement hini e-no kredet ennañ. Doue a lenn en or buez evel en eul levr digor frank.

LENNADENN EUZ LEVR AN DISKULIADUR:

- 20/11. Me, Yann, a welas eun tron bras gwenn-kann hag an hini a oa azezet warnañ.

A-zirazañ e tehas an douar hag en neñv
ha ne oe kavet ken leh ebed dezo.

12. Hag e welis ar re varo, ar re vras hag ar re vian,
en o zav dirag an tron.
Digoret e oe levriou hag eul levr all a oe digoret:
al levr euz ar vuez.
hag ar re varo a oe barnet hervez ar pezh a oa skrivet
war al levriou, peb-hini diouz e oberou.

14. Hag ar maro hag an Hades a oe stlapet eul lenn a dan,
-an eil maro eo al lenn-se a dan.

15. Ha kement-hini na oe kavet e ano skrivet
war al levr euz ar vuez
a oe stlapet el lenn a dan.

- 21/1. Hag e welis eun neñv nevez hag eun douar nevez,
rag an neñv kenta hag an douar kenta
a oa eet kuit
hag ar mor ne oa mui anezañ.

DA BELEH EZ A AR BED ?

Amañ eur weledigez da Zant Yann: a-dreuz ar stourmadou, an oll
dud a wel'o sevel ar bed da zond:

Doue a zo ganeom, ne zilez ket ar bed, rei a ra dezañ eur stumm
nevez, dond a ra da jom ennañ; rei a ra deom e garantez hag e vuez.

LENNADENN EUZ LEVR AN DISKULIADUR:

1. En deiziou-se, me, Yann, am-eus gwelet eun neñv nevez hag eun douar
nevez,
rag an neñv kenta hag an douar kenta a oa eet da get,
hag ar mor n'eus mui anezañ.
2. Ha me, Yann, am-eus gwelet ar gêr zantel, Jeruzalem nevez,
o tiskenn euz an neñv, a gichen Doue,
kempennet evel eur wreg nevez, fichet evid he gwaz.
3. Ha klevet am-eus eur vouez kreñv o tond euz an tron, hag a lavare:
"Setu demeureañs Doue gand an dud, bez'e vo o chom ganto,
int a vo e bobl, ha Doue e-unan a vo ganto."
4. Seha a raio Doue an oll daelou euz o daoulagad,
hag ar maro ne vo mui anezañ;
ne vo mui na kañv, na klemm, na poan,
rag ar bed kenta a vo eet da get."
5. Hag an hini 'oa azezet war an tron e-neus lavaret:
"Setu omaon oh ober nevez peb tra."
- 6b. Me a zo ahanon an Alfa hag an Omega,
ar pennkenta hag ar penn diweza.
D'an neb e-neus sehed me a raio evid netra
euz mammenn ar vuez.
7. An hini a vo treh e-no kement-se da lod;
hag e vezin evitañ eun Doue
hag en a vo evidom eur mab.

SALMOU.

DISKANOU HAG A HELLER DA ZIBABA:

El levrig "Joa d'an Anaon" e hellfed kaoud meur a hini gand an toniou da vond da heul.

1) D'an anaon, roit va Doue,
peoh ha diskuiz 'vid a'ao,
ha sklerijenn ho paradoz
da bara bepred warno.

2) Kanit, va ene (salm IO2)

3) Mond davedoh, Aotrou... (Salm 83)

4) Digand Doue, me houlenn (salm 26)

Bez 'ez eus c'hoaz diskanou kantikou.

1) Epad an amzer Fask:

Euz ar bez beo on savet
ha ganeoh e vezen bepred (Breiz a gan N°5 p I2)

2) A-hend-all war ar bloaz:

a) Tremen 'ra peb tra (kantikou brezoneg N° 27)

b) Eürus an hini (N° II)

c) Baradoz dudiuz (N° 35)

d) Jezuz pegen braz 've (N° 34)

e) Kaer ha plijuz meurbed, el levrig "Gwerenn war gan"

f) Beva en ho palez (Breiz a gan N° 5 p. 2I)

g) Warzu ennoh e savan va ene
va oll fiziañs 'zo ennoh va Doue. (Breiz a gan N°5 p 3)

Pe re all:

Roit dezo; Aotrou Doue,
sklerijenn da viken.

(Gwir vugale ar Werhez)

SALMOU.

I-SALM 4/2,4,7,9:

Diskan: Er peoh mirit va ene,
en ho kichen, Aotrou Doue.

2-Pa zavan va mouez davedoh, va zelaouit, c'hwi, va Doue,
Va diboania 'rit pa vezan ankeniet;
ho pet truez ouzin ha selaouit va 'fedenn.

4-DEoh oll eo da houzoud e-neus Doue dibabet evitañ eur zervicher;
kleved a ra an Aotrou, pa hopan d'e hervel.

7-Lakit da bara warnom ar sklerijenn euz ho tal, Aotrou Doue !
C'hwi eo a laka levezet leiz va halon.

9-Er peoh ez an d'am gwele hag e teu ar housked din,
rag c'hwi hebken, Aotrou Doue, a ra din diskuiza dienkrez.

2-SALM 15/ I-2a,5,7-8, 9-10, II.

Diskan: Va diwallit, Aotrou Doue
c'hwi eo va esperañs.

1-Va mirit, Aotrou Doue,
en ho kichen, e kavan repu.

2a-Lavared a ran d'an Aotrou: "C'hwi eo va mestr."

5-C'hwi va lod ha va halirad;
etre ho daouarn ema va flanedenn.

7-Bennoz d'an Aotrou e-neus roet kuzul din;
dre va housk zoken e kendalh d'am hentelia.

8-Heb ehan e talkan an Aotrou dirazon,
p'ema en tu dehou din, ne gouezin ket.

9-Tridal a ra va halon ha joa 'zo em ene
ha va horv ive' zo er peoh.

10-Na zilezit ket ahanon e brô an anaon,
ha ne vo ket ho mignon boued ar vreinadurez.

11-Ober a reoh din anaoud hent ar vuez,
dirazoh ar galon 'zo leun-barr a levezet.

Diskan: Doue eo va fastor,
ne vanko din netra
rag war ar peuri druz
am has da ziskuiza.

(Breiz a gan N°3
p.36)

1-An Aotrou eo va fastor, n'am-eus diouer^a netra

2-War ar prajou geot tener e ra din gourvez;
daved doureier an diskuiz e kas ahanon.

3a-ha nerz fresk a ro d'am ene.

3b-Va heñcha 'ra dre ar gweno jennou surra, evid enor e ano.

4-Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,
n'am-eus aon rag droug ebed, rag c'hwi 'zo ganin.
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.

5-Evidon e lakit an daol, dirag sellou va enebourien;
an eoul c'hwez-vad a skuillit war va fenn,
ha va halir a zo leun-barr.

6-Eürusted, gand ho madelez, a vo o lod,
bemdez 'hed va buez;
digemer a gavin e ti an Aotrou, epad hir amzer.

4-SALM 24/ 6-7, 17-18, 20-21:

Diskan: Na zizoñjit ket Aotrou Doue
ho madelez hag ho trugarez

(versets 6-7 levr A.
p.103)

17-Tennit an anken diwar va spered,
va zizammit euz va enkrez.

18-Gwelit va foan ha va dienez,
va dieubit diouz va oll behejou.

20-Diwallit va ene, deuit d'am dili^{va},
va fiziañs a lakan ennoh, grit n'am-bo ket mez.

21-Onestiz ha lealded am diwall,
ennoh, Aotrou, eh esperan.

Diskan all:

Dre heñchou ar peoh,
Deuit d'am ren, Aotrou Doue.

Diskan: Eun dra a zo va c'hoant:
mond da jom e ti an Aotrou.

Diskan

all: Warzu ennoh e savan va ene;
va oll fiziañs 'zo ennoh, va Doue.

(Breiz a gan 5p.3)

1-Va sklerijenn ha va zilvidigez eo an Aotrou
rag piou am-bo aon ?

Moger-divenn va buez eo an Aotrou
dirag piou e krenin ?

2-Eun dra am-eus c'hoant braz da gaoud,
a houlennan digand Doue,
Mond da jom e ti an Aotrou Doue,
epad va oll amzer.
Eun drugar 'vo din peoh an Aotrou Doue,
hag eun dudi gweled e zantual.

13-Sur on e welin madelez an Aotrou Doue
e bro ar re veo !

14-Gortoz an Aotrou gand fiziañs, bez dispons ha kaloneg,
gortoz an Aotrou Doue.

6-SALM 30/ 2-3a, 3b -c-4, I7,25

Diskan: Warzu ennoh e savan va ene.
Va oll fiziañs 'zo ennoh, va Doue.

pe: Ennoh ema va fiziañs,
Deuit d'am zikour, Aotrou Doue.

2-Ennoh, Aotrou Doue, e kavan va repu;
grit n'am-bo ket da gaoud mez;
en ho justiz, deuit d'am zikour.

3a-Troit ho skouarn warzu en-on,
hastit buañ va zavetei.
Bezit evidon eur roh da rei din repu,

3bc- Eur hastell, ma vin ennañ e savete.

4-Ablamour d'hoñ ano, va henchit ha va harpit.

17-Taolit war ho servicher euz zell a garantez;
Deuit d'am zavetei dre ho kras.

25-Dalhit mad ha bezit kaloneg,
c'hwil oll hag a laka o fiziañs en Aotrou.

DISKAN: Roit ho peoh, Aotrou Doue,
d'ar re a gont warnoh.

5. Pa zavan va mouez war-zu Doue, e vezan selaouet gantañ,
va zizamma 'ra euz peb enkrez.

6. Pa droer ar zellou warnañ, e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar vez.

18. Gelver a reont hag e selaou anezo,
o dilivra a ra diouz peb anken.

19. Tost ema ouz an dud rannet o halon,
savetei 'ra ar sperejou ankeniet.

20. Reuz ha reuz eo lod an den just:
med tro bep tro e teu Doue d'e zilivra.

23. Dasprena 'ra Doue e servicherien,
kastiz ebed d'anneb a glask repu ennañ.

8- SALM 41 / 2, 3, 6

DISKAN: Sehed e-neus va ene euz an Doue beo,
pegoulz eta e hellin mond da weled dremm Doue.?

2. Evel an heizez oh hircvoudi warlerh an dour-red,
evel-se ivez eh hircvoud va ene war-zu ennoh, va Doue.

3. Sehed e-neus va ene euz a Zoue, an Doue beo.
pegoulz eta e hellin mond da weled dremm Doue ?

6. Perag koll kalon, o va ene, ha perag huanadi ?
ESper e Doue; embann a rin c'hoaz
eo En va Zalver ha va Doue.

9- SALM 62/ 2, 3-4, 5, ha 9.

DISKAN: En ho kichen, Aotrou Doue,
peb peoh ha peb levenez.

2. Aotrou, c'hwil zo va Doue,
c'hwil a glaskan kerkent ha goulou-deiz.
Sched ahanoh e-neus va ene, dizeha 'ra va horv hebdoh
evel ma teu an douar heb dour da graza ha da skarnila.

3. En ho ti santel on deuet d'ho klaved,
estlammet gand ho kalloud hag ho kloar.

4. Muioh a dalv din ho madelez eged ar vuez
rag-se ema ho meuleudi war va muzellou.

5-Ya, bennoz deoh a lavaran 'hed va buez
 en enor d'hoh ano e savin d'an neh va douarn
 9.en em staga a ran ouzoh a-greiz kalon
 war nerz ho torn on harpet.

10-SALM 85/ 1-2bc, 5-6, 3-7, 15 bcd, 16.

DISKAN: Tost, tost ema Doue,
 Ouz ar re a zeu d'e helver.

- 1.Selaouit, Aotrou Doue, ha respontit din,
 paour ha reuzeudig ma'z on.
- 2.Diwallit va ene, me'zo ho servicher
 ha warnoh e kontant.
- 5.Aotrou Doue, c'hwi 'zo mad ha trugarezuz,
 leun a garantez evid ar re a zeu d'ho ketver.
- 6.Selaouit, Aotrou, va fedenn,
 klevit va mouez ouz ho pedi.
- 3.C'hwi eo va Doue: truez ouzin, va Aotrou,
 war-zu ennoh e halvan 'hed an deiz.
- 7.D'an devez a anken ho kalvan,
 rag respont a roit din.

15bcd.Doue trugarezuz ha mad
 leun a garantez evid ar re en em erbed ouzoh,
 16.taolit ho sell warnon, bezit truez ouzin.

11-SALM- 102/ 8 ha 10, 13-14, 15-16, 17ab-18:

DISKAN: Aotrou, skuillit warnon ho karantez,
 ennoh ema an esperañs.

- 8.Madelez ha trugarez eo an Aotrou Doue
 diwezaad da dêri ha madelezuz kenañ.
- 10.N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver
 n'eo ket diouz an droug a reom e kastiz ahanom.
- 13.Evel m'e-neus eun tad kalon dener ouz e vab,
 evelse an Aotrou Doue evid an dud a zoui anezañ.
- 14.Gouzoud a ra gand petra om greet,
 soñj e-neus n'om nemed ludu.
- 15.An den a zo e vuez evel ar geot,
 Bleunia 'ra evel bokedou ar mêziou
- 16.An avel a c'houez warnañ
 ha n'eus mui anezañ
 n'ouzer ket zoken e peleh edo.
- 17.Med karantez Doue evid ar re o-deus doujañs evitañ
 a zo anezi a-viskoaz ha da viken.
- 18.hag e justiz evid bugale o bugale
 evid ar re a vir e emgleo.

DISKAN: Kerzed a rin dirag Doue,
e bro ar re veo

10. Fiziañs am-eus bet atao,
ha pa lavaran: gwall reuzeudig on.

11. Strafuillet oll e teue din lavaret;
"An dud n'eus nemed geier ganto."

15-Tenn eo d'an Aotrou gweled e vignoned o vervel.

16. Me ho ped, Aotrou! ho servicher en-me ivez,
ho servicher ha mab d'ho servicherez,
ha torret ho peus va liammou.

5. Madelezuz eo an Aotrou, ha just eo ivez;
ya, on Doue a oar truezi.

6. Divennour ar re vianig eo an Aotrou;
pa oan kouezet dinerz, e-neus va zaveteet.

13-SALM 121/ 1-2, 3-4, 8, 9

DISKAN: Eüruz an hini a garo Doue,
euz e oll galon hag e oll ene.

1. Stad oa ennon pa'z eus bet lavaret din:
Deom da di an Aotrou Doue.

2. Ha setu ni chomet a-zav
dirag da zoriou, Jeruzalem.

3. Jeruzalem, savet evel eur gêr,
unanet start enni an tiêz;
di e pign ar meuriadiou

4a. meuriadou an Aotrou Doue.

8. Dre garantez evid va breudeur, va mignoned
e houlennom evidout ar peoh.

9. Dre garantez evid ti an Aotrou, on Doue,
e houlennom evidout levenez.

14-SALM 129/ 1, 2, 3-4, 5-6, 7

DISKAN: Me a laka va fiziañs
Aotrou en ho sikour.

1. Euz an toull don ha teñval
e hopan d'ho kolver, Aotrou Doue,
va Doue, selabuit va mouez

2. Troit ho tiskouarn da gleved va fedenn virvidig.

- 3-Ma sellit piz ouz ar pehejou, Aotrou,
piou a hello herzel ?
- 4.N'eo ket evelse; rag ganeoh e kaver ar pardon,
bez'e heller ho servicha gand doujañs.
- 5.En gortoz euz an Aotrou, emañ,
va ene 'zo en gortoz; en e gomz am-euz esper.
- 6-Fizioud a ran war an Aotrou
surroh eged eur gedour-noz war houlou-deiz.
- 7.Surroh eged ar gedour o hortoz goulou-deiz;
ra lako Israel e fiziañs en Aotrou Doue
Rag an Aotrou 'zo eur mor a drugarez
gand largetez e ro ar zilvidigez.

15- SALM 142/ 1-2, 5-6a, 7ab-8ab, 10

DISKAN:

Aotrou Doue madelezuz
Selaouit or pedenn.

- 1.Aotrou, selaouit va fedenn,
grit digemer mad d'am goulenn;
c'hwi hag a zo just, roit respont din.
- 2.Na zeuit ket da varn ho servicher,
netra veo n'eo just dir azoh.
- 5.Dond a ra em spered an deizioù a-wechall
Soñjal a ran e kement ho-peus greet
ha chom da brederia war oberou ho taouarn.
- 6a.Astenn a ran va daouarn war-zu ennoh.
- 7ab.Roit din buan respont, Aotrou,
n'on ket evid gortoz
- 8ab.Grit din anaoud abred ho karantez
ennoh emañ va fiziañs.
- 10-Deskit din ober ho polontez
rag c'hwi 'zo va Doue;
Ra zeuy ho spered d'am ren
dre eun hent êz.